

Bezañ stummet e brezhoneg : hentoù nevez

A-drugarez d'ur c'henlabour etre ar greizenn-stummañ Stumdi, hag hini ar C'huzh-heol (C.F.C.P, lec'hiet e Brest), e vo kinniget adal distro-skol 2014 un dibab studioù nevez evit al liseidi hag an dud deuet divyezhek.

Eus an tu kleiz d'an tu dehoù, Fulup Kere, rener DAO kengevredigezh ar c'helenn brezhoneg d'an oadourien, Malo Bouéssel du Bourg, rener Product e Breizh, Fulup Jakez, rener Ofis publik ar brezhoneg (kevelerien a gemero perzh en atalieroù e brezhoneg), Naig Daouphars, ezel eus burev Stumdi, Pierre-Yves ar Gall, rener Kreizenn stummañ ar C'huzh-heol (CFCP) ha Claudie Malnoe-Motais, renerez Stumdi (krouerien ar raktres).



© Stumdi

anavezet mat eo Stumdi evel ar greizenn-stummañ goshañ ha kantadoù a nevezvrezhonegerien an hini eo zo bet stummet ganti. Abaoe pell ivez ez eo prederiet skipailh Stumdi gant kinnig stummadurioù liesseurt, n'eo ket da zeskiñ ar yezh met d'en em varrekaat war dachenn pe dachenn. Lakaat ar brezhoneg da dalvezout ha da gavout e blas war gement tachenn zo.

Ar wech-mañ ez eo pemp stummadur nevez a vo kinniget, a-drugarez d'ur c'henlabour gant Kreizenn stummañ dibaoez ar C'huzh-heol e Brest. Brezhoneg a vo eta e tri BTS (Merañ an Unvezioù Kenwerzhel, Skoazeller war ar merañ EBE1-GBE2, Kevraouiñ Darempred Arvalien) ha daou DESS (Marketing, dibab Kenwerzh enlinenn ha Koskor, dibab goprou).

DIBABOÙ NEVEZ

Perak kinnig dibaboù nevez goude ar vachelouriezh ? Abaoe ugent vloaz eo boas kreizenn stummañ ar C'huzh-heol

da ginnig seurt stummadurioù. Dedennet-bras gant ar brezhoneg e oa he rener, Pierre-Yves ar Gall ha c'hoant en doa da ginnig dibab ar brezhoneg. Eus he zu, Stumdi, he doa klevet meur a wech ne oa ket kement-se a zibaboù evit al liseidi divyezhek goude ar vachelouriezh (nemet ar skolioù-meur), m'o devoa c'hoant da zeskiñ ur vicher, en ur genderc'hel memes tra d'ober gant ar brezhoneg. A-drugarez d'he servij-heñchañ, e oa bet merzet ivez gant Stumdi e oa muioc'h-mui a c'houlennoù digant an implijerien, o klask warlerc'h implijidi divyezhek a bep seurt profiloù ganto.

KEVRAT LABOUR MICHERELAAT HA BREZHONEG

Peseurt statud a vo gant ar studierien ? Degemeret e vint en un embregerezh, ur stal, dindan ur gevrat labour micherelaat war daou vloaz : daou zevezh er skol ha tri devezh war al lec'h labour, 1 100 eurvezh a gentelioù en holl. Ha peseurt programm a vo kinniget e brezhoneg ? 105 eurvezh a vo kinniget d'ar studierien war

an daou vloaz, da lavaret eo pemzek devezh. Goude bezañ gwiriet ha kreñvaet al live yezh (tri devezh), e vo rannet ar programm etre daou brantad. Gant bed an embregerezhioù/stalioù e vo pledet er prantad kentañ. Pep devezh a vo gouestlet d'un tem resis (pratikoù, gwerzh, kontoù...). Diouzh ar mintin, deskiñ ar c'heriaoueg, ha diouzh an endervezh, poelladennoù pleustrek. En eil prantad e vo lakaet ar pouez war ober anaoudegezh gant ar re a implij brezhonegerien. A-raok reiñ lañs d'ar programm nevez-mañ e oa bet an daou geveler o kejañ ouzh implijerien hag a labour e brezhoneg, pe a zo tost d'ar yezh, ha prest da blantañ brezhoneg e-barzh o embregerezh/stal a-benn muzuliañ an ezhommoù gwir.

Ur c'hammed ouzhpenn evit lakaat hor yezh da gavout he flas e bed al labour.

O.M.

1. EBE : embregerezhioù bihan hag etre
2. GBE : greanterezhioù bihan hag etre

Evit gouzout hiroc'h :
C.F.C.P. WWW.CFCP-FORMATION.FR
Stumdi WWW.STUMDI.COM